

# Lann Vraz, ar film bras



Mark (Erwan Kloareg).

© Gilbert Le Moigne



© Cécile Jacques



© Ronan Le Pennec

E kêriadenn Lann Vraz emañ embregerezh istr familh an harozez, Gwenn (Aziliz Bourgès).

**Emañ produerien Kalanna o peurechuiñ ur film faltazi brezhonek, Lann Vraz e ditl, sevenet gant Soazig Daniellou. Ul lodenn a oa bet skignet war France 3 c'hoazh, hag ar film a-bezh a vo diskoachet e miz Ebrel.**

**P**a oa bet krouet an ti-produiñ Kalanna e 1997 gant Soazig Daniellou, Roland Michon hag Herve Morzadeg, o doa merzet ne oa ket stank ar produiñ e brezhoneg. C'hoant o doa da sevel rak-tresoù a denne outo, filmoù-faltazi brezhonek. Ne oa ket fonnus an niver a skrivagnerien evit ar sinema e brezhoneg siwazh. Penaos produiñ ur film ma n'eus den evit e skrivañ ? A-drugarez da verz an eilmouezhiañ ha da TV Breizh, a oa skoazellet gant ar Rannvro, o doa merzet e oa poent bras ober un dra bennak.

## STAL-SKRIVAÑ

Gant sikour Dizale ha Stumdi e oa bet lakaet e plas ur stal-skrivañ senarioioù e brezhoneg gant skoazell Tahdg Mac Dhonnagáin, ur senarier a-vicher eus Iwerzhon [s.o. *Bremañ* niv. 341]. C'hwec'h den a gemeras perzh er raktres : Goulwena an Henaff, Aziliz Bourgès, Soazig Daniellou, Yann-Edern Jourdan, Ronan Hirrien hag Emmanuel Roy, evit kenlabourat war tudennoù bet kinniget gant Kalanna. En holl, pevar frantad eizhteiz a oa bet lakaet e plas evit labourat war skritur un heuliad filmoù-berr anvet **Lann Vraz** (6 pennad 26

munutenn). An hini kentañ, Distro Gwenn, bet skrivet gant Aziliz Bourgès ha Soazig Daniellou, a oa bet skignet e miz Kerzu 2011 gant France 3. Dibaoe eo bet kemmet senario **Lann Vraz** evit ober daou bennad 52 vunutenn. Filmet e oant bet etre kreiz miz Eost ha fin miz Gwengolo 2012 e-kostez Plougastell-Daoulaz gant Aziliz Bourgès, Erwan Kloareg, Marion Gwen, Klet Beyer, Nicole ar Vourc'h, André Morvan, Bob Simon, Tony Foricheur, Kaou Langoed, Marie Kermareg, Yann-Edern Jourdan, Goulwena an Henaff, Yann-Herle Gourvès, Anna Vassal ha Gaël Lechoisne.

## AN ISTOR

Gwenn, ur plac'h a dregont vloaz, a zistro da Lann Vraz, ar gêriadenn he doa kuitaet pemp bloaz a-raok evit mont da Arc'hantina. Kendrec'het eo bet gant he breur Fañchig da zistreiñ da-geñver 60 vloaz he mamm. Ouzhpenn gwelout he mamm endro e fell da Wenn adkavout Mark he c'harantez kozh...

## AN DANVEZ A-RAOK AR YEZH

Hervez ar broduerez Anna Lincoln ne oa ket ar pal pouezusañ kinnig ur film brezho-

## Sellet ouzh Lann Vraz

**Lann Vraz** o vo diskouezet adalek fin miz Ebrel ouzh skrammoù bras zo dre ar vro, e Plougastell, Roazhon ha Naoned da vihanañ. Skignet e vo ar film gant France 3 e div lodenn, d'ar Sul 21 hag 28 a viz Ebrel, ha diwezhatoc'h en e bezh en un taol. Kenbroduet eo bet gant France Télévisions, Tébéo, TVR 35, Ty Tél, gant skoazell Kuzul-rannvro Breizh hag ar CNC.

Evit gouzout hiroc'h : [WWW.KALANNA.COM](http://WWW.KALANNA.COM)

nek. Ar brezhoneg a oa un doare da gas ar film war-raok, evel ma vez graet gant yezhoù all. Ar c'hoant o doa izili ar skipailh da ginnig temoù ordinal hag a c'hellfe dedennañ al lodenn vrasañ eus ar sellerien. Temoù evel ar familh, an darempredoù etre an dud hag ar garantez e brezhoneg. Hervezi, evit kas ar raktres da benn e oa poellek e vefent holl brezhonegerien, ar skipailh teknikel kerkoulz hag an hini arzel, evit reiñ ur sell gwirion d'an darvoudoù diskouezet ha bevet.

Valérie Kervella

Skipailh filmañ **Lann Vraz**. A-geiz emañ Soazig Daniellou, sevenerez ar film, o heñchañ an aktored. Daou gamera a c'heller gwelet aze.



© Cécile Jacques



© Ronan Le Pennec

## Yann-Edern senarier hag aktor

Yann-Edern Jourdan, paotr ar c'hlap ivez.

**Plijadur vras en deus bet Yann-Edern Jourdan o kemer perzh er film, da gentañ evel unan eus ar senarierien, met ivez evel skriptour hag evel aktor. Yann-Edern a vil vicher eo bet a-hed ar seveniñ.**

## Gant petra out bet plijet ?

Da gentañ on bet plijet o welet ur raktres boulc'het abaoe ur pennad mat deuet da wir. Skrivet eo bet **Lann Vraz**, e stumm ur film hir, gant Soazig Daniellou hag Aziliz Bourgès. Pa oa anv e vefe stumm un heuliad d'an oberenn e oan bet degemeret gant Soazig e-touez ar pemp skrivagner all bet bodet tro-dro dezhi. Neuze, ha p'eo bet cheñchet an istor, a-benn ar fin ez eus un tammig eus pep hini ac'hanomp e **Lann Vraz** mod nevez. Plijet on bet ivez o kaout tro da anavezout ar sinema o vezañ tro-kein ar c'hamera. Soazig he doa kinniget e vefe roet pep a roll d'an holl a oa bet o kemer perzh azalek deroù **Lann Vraz**. Komedian on met n'eo ket alies e c'heller labourat e brezhoneg evit filmoù nag eus un tu nag eus egile. Un dibab 'm boa d'ober. Setu, pa blij din ar skrivañ, al leurreniñ hag ar sinema e felle din gouzout ha danvez a-walc'h a vefe ennon evit sevel ha kinnig ur film un deiz bennak, piv 'oar ? Degemeret on bet evel skriptour, un taol-chañs ! E-mod-se 'm eus bet gallet bezañ war meur a dachenn, kaozeal gant meur a hini, kompren meur a dra, ha kaout ur sell ledanoc'h ouzh ar sinema. Hag a-benn ar fin, e oan bet o c'hoari un tammig bihan memestra, o reiñ korf da Loeiz (mestr-micherour stal-istr **Lann Vraz**).

Bremañ 'vat e ouezan on dedennet da vat gant ar sinema

kement ha ma ouezan re vat : sevel ur film zo ur sapre abadenenn ! Ha c'hoazh ne gomzan ket diwar-benn al labour a-raok, al labour e-keit hag al labour war-lerc'h ar produiñ, kaset gant tud ha ne vezont ket gwelet kement-se hag a rank bezañ kalonek da vat.

## Peseurt aergelc'h a zo gant brezhonegerien nemetken ?

Petra poellekoc'h eget labourat gant brezhonegerien war ur raktres brezhonek, pa c'haller, ha pa glot barrezhoù pep hini ouzh dibaboù arzel al labour a zo da gas da benn ?

Diaes eo din keñveriañ gant ur film all, siwazh. Ur wech 'm boa bet tro da labourat evit ul labour skinwel e brezhoneg gant ur sevener ha na ouie ket brezhoneg. Evitañ e oa bet ranket treiñ pep tra e galleg, koll amzer marteze nemet war-lerc'h e oa bet anv gantañ da vont da zeskiñ brezhoneg. Peadra da grediñ en doa bet plijadur, n'eo ket ta ?

Setu, ne ouezan dare hag un aergelc'h ispisial a vefe o labourat gant brezhonegerien hepken. Sur eo ne c'hoarvez ket alies a-walc'h, sur eo e oa laouen an holl o kemer perzh, sur eo e oa laouen an holl oc'h en em gavout asambles ha moarvat e oa bet an holl o labourat gant un draig ouzhpenn, ar santimant d'ober un dra dalvoudus hag ar blijadur d'en ober e brezhoneg !

Komzoù dastumet gant V.K.